

'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp, Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion Met hon diwallit doc'h an droug.

*Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :*

**R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh, ar gelloud hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.**

### Lid ar peoc'h :

*Ar beleg : Salver Jezuz-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.*

*Peoc'h hor Salver a vo bepred geneoc'h. R/ : Ha get ho spered !*

### Oan Doue :

Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : **ho pet truez doc'homp ! (2 wezh)**

**Roit deomp ar peoc'h !**

### Kent ar gomunion :

*Ar beleg : Setu Oan Doue, setu an hini a lam pec'hed ar bed :*

*Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.*

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,  
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

### Komunion : Avel hon tadoù, ni vo tud a feiz !

**Doue a vo bepred hor Mestr hag hor Roue (2 wezh)**

1 Doue a vo bepred Mestr àr pep tiegezh :

Tier Arvoriz 'vo e rouantelezh. (2 wezh)

2 En hon tiegezhioù, sellet 'vo 'vel Roue

Get an tad, ar vamm hag ar vugale.

3 Doue a vo ar Mestr àr hor bugale,

Ma chomo enne dalc'hmat bev er fe(iz).

4 Mar sentont dalc'hmat doc'h gourc'hemenn Doue,

E kavint getañ peoc'h ha levenez.

5 Doue a vo bepred Mestr e Breizh-izel :

Ya, kentoc'h mervel 'veit en dilezel !

### 'Veit kloziñ an oberenn

*Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :*

**R/ : Ha get ho spered !**

*Ar beleg : Doue hollgelloudek d'ho pennigiñ :*

*An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel. R/ : Amen !*

*Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver :*

**R/ : Bennozh da Zoue !**

### Kan-dibenn : Àr ar Vretoned, Mamm a garantez,

**Taolit ag an neañv ur sell a druez. (2 wezh)**

Gwelet hoc'h eus int tolpet a vostad

E Santez-Anna, dirak ho Mamm vat.

Dait da Vreizh-izel : eno pep Breton,

'Vel santez Anna, ho kar a galon.

# Parrez Ker Anna

13<sup>vet</sup> Sul ordinal

5 a viz Gourhelen 2023

### Kan digor :

Tremenet eo an noz, splanniñ a ra an deiz,  
Me 'glev holl an evned é kaniñ gloar da Zoue ;  
Sevel a ran mam bouezh get hini an evned.

'Veit kaniñ en enor da Zoue, Kroueour ar bed.

C'hwi hoc'h eus a netra ma zennet, o man Doue !

Etre ho torn emañ ma marv ha mam buhez,

Ha rak-se e roan deoc'h an deiz a gomañsan ;

En imple 'veit ho kloar a-bezh-kaer e vennan.

Plijet geneoc'h àrnon evezhiat e pep eur

Ha pellaat azoc'hon, en deiz-mañ, pep dañjer ;

Dreist pep tra, o ma Zad a zo e lein an neañv,

Doc'h velim ar pec'hed, gwarantit ma eneañ.

C'hwi a wel an dober am eus ag ho sekour,

Roit enta ho pennozh d'am foan ha d'am labour

D'am c'horf ha d'am eneañ, roit hiniv o bevañs,

Ha be(zi)t C'hwi-mem un deiz en neañv ma c'hoñfortañs.

### Salud d'ar bobl :

*Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad  
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :*

**Respont : Ha get ho spered !**

### Kyrie (Ordinal hervez ton gwerz Skolan)

**O Aotrou Doue : ho pet truez !**

**O Aotrou Krist : ho pet truez !**

**O Aotrou Doue : ho pet truez !**

### Gloria : Gloria ! Gloria ! In excelsis Deo !

**Et in terra pax omnibus bonae voluntatis !**

Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h adoriñ a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an neañv, Doue an Tad hollgellougek. *Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwi hag a lam pec'hedoù ar bed, ho pet truez doc'homp.*

*C'hwi hag a lam pec'hedoù ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwi hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp. Rak C'hwi hepken a zo santel.*

*C'hwi hepken a zo Mestr. C'hwi hepken a zo uhel-meurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !*

**Lennadenn getañ :** *Lennadenn tennet a eil levr ar Roueed.*

*Un deiz e tremenas ar profet Elize dre Sumam. Hag eno e oa ur vaouez pinvik hag a zalc'has àrnezhañ da zonet da breidiñ devati. Ha goude, seul gwezh ma tremene dre eno, e tistroe devati da zebriñ pred. Ha hi da lâret d'he gwaz : «Setu. Gouiet a ran eo un den santel an hini a dremen dalc'hmat dre zu-mañ, un den Doue. Klev 'ta ! Greomp ur pezh bihan el lein, ur gamprig get ur speurenn; e-barzh, ni a lakao dezhañ ur gwele, un daol, ur gadoer hag ur c'houlouenn; ha, pa zay devadomp, en em denno eno.» Hag un deiz ma oa-eñ ar rivet eno, en em dennas da gousket er gambr-uhel. Ha eñ a lâras d'e servitour : «Petra a c'heller ober evit ar vaouez-se ?» Giezi, ar servitour, a respontas : «Siwazh ! N'he deus mab ebet, hag e gwaz a zo kozh !» Elize a lâras : «Lâr dezhi donet !» Hag he gervel a reas. Ha donet a reas betek treuzoù an nor. Elize a lâras dezhi neuze : «Ar blez-mañ 'za, d'ar c'houlz-mañ, t'ah po ur mab da zougen àr da vrec'h.» Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !***

**Psalm 88 :** *Meulomp holl, leun a joa, madelezh an Aotrou Doue ! (2 wezh)*

*Trugareziou an Aotrou a faot din kaniñ*

*da viken a rummad da rummad*

*El lâret a ran : «Diazezet oc'h eus ho madelezh evit atav»,*

*divrall emañ ho fealded en neñvou.*

*Eürus ar bobl a oar youc'hal en enor deoc'h,*

*a gerzh e sklêrijenn ho tremm, Aotrou;*

*ar re a gav bepred o levenez en hoc'h anv,*

*hag en ho reizhder an nerzh da adsevel.*

*C'hwi a roa dezhe splannder ha gelloud,*

*diâr-bouez ho krad-vat e sav uhel o nerzh.*

*Ya, hor skoed-difenn eo an Aotrou,*

*hor roue-ni eo Doue santel Israel.*

**Eil lennadenn :** *Lennadenn tennet a lizher an apostol Paol d'ar Romaned.*

*Ma breuder : Ha ne ouit-c'hwi penaos ni holl hag a zo bet badezet er C'hrist Jezuz, emañ en e varv eo eh omp bet badezet ? Kevret getañ eh omp bet lakaet er bez dre ar vadeziant evit mervel, evit donet ni ivez, 'vel mand 'eo adsavet ar C'hrist a-vesk ar re varv dre nerzh gloar an Tad, da vevañ 'veltañ en ur vuhez nevez. Neuze, mard omp marv àr-un-dro get ar C'hrist, kredomp hor bo buhez ivez àr-un-dro getañ, rak gouiompat an dra-se, ar C'hrist adsavet a vesk ar re varv ne varvo ket ken, hag ar marv n'en do ket ken gelloud àrnezhañ. E varv a oa ur marv d'ar pec'hed, ur wezh evit mat; met ar vuhez a zo ur vuhez evit Doue. Ha c'hwi ivez er mem feson, en em sellit 'vel marv d'ar pec'hed, met é vevañ evit Doue er C'hrist Jezuz. Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !***

**Allelouia :**

Ar beleg : *An Aotrou Doue geneoc'h :* **Ha get ho spered.**

Ar beleg : *Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Mazhev.*

Ar bobl : **Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !**

**Aviel :** *En amzer-hont e lâras Jezuz d'e zisiplad : An hani a gar e dad pe e vamm muioc'h 'vidon-me ned eo ket gwir disipl din ; hag an hani a gar e vab pe e verc'h muioc'h 'vidon-me ned eo ket gwir disipl din. An hani na gemer ket e groaz ha n'em heuli ket ned eo ket gwir disipl din. An neb en devo gouarnet e vuhez he c'hollo ; hag an neb a gollo e vuhez abalamour din, he c'havo en-dro. An hani ho tegemer, am degemer ; hag an hani am degemer a zegemer an hani en deus man daveet. An hani a zegemer ur profet, rak mand eo ur profet, en devo digoll ur profet, hag an hani a zegemer un den santel, rak mand eo santel, en devo digoll un den santel. Ha piv bennak a roay ur werennad dour yen d'unan ag ar re dister-mañ, rak m'emañ disipl din, e gwirionez m'el lâr deoc'h, ne gollo ket e c'hopr.*

En dibenn : ar beleg : *Setu Komz an Aotrou :*

**R/ : Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !**

**Kredo :** **Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek,** Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, deuet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad, a-eno e tay da varn ar re vev hag ar re varv. Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

**Pedenn hollbedel :** **Aotrou, hon Doue, ô Tad Santel, selaouit hor pedenn !**

**Lid ar profoù :**

*ar beleg : Pedit, mam breuder, ma plijo get Doue an Tad holl-gelloudek*

*degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :*

**R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.**

**Prefas :**

*Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :*

**R/ : Ha get ho spered !**

*Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :*

**R/ : Emañ troet trema Doue !**

*Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :*

**R/ : Just ha santel eo !**

**Santel :** **Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr ar bed !**

Lan eo get ho kloar an ne hag an douar : Hosanna e lein an ne !

Benniget an hani a za e anv Doue : Hosanna e lein an ne !

**Gorreoù :** **Degas 'reomp da soñj ag ho marv,**

**Aotrou Krist savet da vev,**

**Ha gortoz a reomp ho tistro.**

**Hon Tad :** hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet, Ho rouantelezh

degaset deomp, Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel en neañv.

Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek, Pardonit deomp hor pec'hedoù,